

AN AMZER

NIVERENN 16 4 FAJENN 2 LUR
2vet bloavezh Bep Gwener

Mererezh, Skridaozerezh :
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

TANIO: SKUIZH HA DIGALONEKAET EO AN DUD



Kliched AN AMZER - I.M.

An Draezhenn Wenn (Tregastell)

Lanuon.- Kant kilometrad a aodoù a zo saotret bremañ gant eoulmaen an Tanio. Nebeutoc'h a dud eus ar vro ez eus e-touez ar re a labour evit naetaat an aod: digalonekaet int.

Pounner ha stank eo tireoul an Tanio, ha n'eo ket evel hini an Amoco-Cadiz a oa skañv. N'eus nemet gant ar sailhoù hag ar palioù ez eus tu d'ober ul labour a-zoare: nebeut a dra pa weler stad an traezhennoù a zo saotret.

An devezhioù-mañ e oa reverzhioù kedez Nevez-Amzer. Fall eo dre vras an avel er mare-mañ, o tont eus Kornog pe Walarn. Eürusamant, ar freuzioù graet gant an avel a chom etre.

Koulskoude e chom ur mell labour d'ober, ha skuizh eo dija ar soudarded yaouank a zo war an dachenn.

Ouzhpenn 1/3 eus evned ar 7 enezenn a zo en ur stad fall.

Ur c'henlabour DAZONT-AN AMZER:

«ROAZHON HIZIV»

Ar gevredigezh DAZONT, krouet nebeut 'zo, a zo o vont da sevel ul levrig: Roazhon Hiziv, hag e vo kavet ennañ roll an holl straedoù e Roazhon hag he bannlev, ur roll divyezhek e vo. Kavet e vo ivez titouroù a bep seurt, talvoudus da bep hini a zo o chom e Roazhon, pe a dremen dre ar gêr-mañ evit un devezh pe ur sizhunvezh, chomlec'hioù e-leizh, ha niv-erennoù pellgomz: mererezhioù, ar burevioù-post, ar c'hoariva-où hag ar fiñvskeudenndioù, roll ar skolioù hag ar skol-veurioù, pelec'h kavout ur sportva pe ur sal d'ober mellzorn (handball), chomlec'h an ospitalioù hag ar c'hlañv-dioù, ar mirdioù, ar c'hirri-boutin, hag e brezhoneg. Ha marteze e vo kavet ur gartenn vrezhonek eus kreiz-kêr...

Savet e vo an oberenn gant DAZONT, moulet (un nebeut kant-adoù) hag embannet gant AN AMZER.

Kaset e vo al levrig-se evit

netra da holl goumananterien AN AMZER (kalzig e Roazhon), ivez da vererezhioù ar gêr (ar post, ar maerdi...), ha da embregerezhioù 'zo. Lennet e vo, servijout a raio...

Ar re a zo dedennet gant bruderezh da embann e-barzh al levrig-se, a c'hell skrivañ d'ar gevredigezh, pe da AN AMZER (2straed ar Richardiere, 35100 Roazhon).

KOMZOÙ DIEUB

Diwar-benn ar pennad "Breizh hag Afghanistan", hag emzalc'h ul lenner a-zivout ar pennad-se. Setu un emzalc'h all.

Lennet em eus ivez pennad war Afghanistan evel J.C. eus Pontmain. Eveltañ n'on ket a-du gant ar pennad. Met petra 'ta, abaoe un hanter kantved e lennan kelaouennoù. Morse n'on bet a-du gant an holl bennadoù, ha m'am bije dilezet ar c'helaouennoù evit an dra-se, petra (Kendalc'h pajenn 4)

Digalonekaet annezidi aodoù Bro-Dreger: nebeut a dud a youl-vat en o zouez evit naetaat loustonioù an "Tanio". "Lavaret e oa bet dimp, emezo, ne vije biken ken eus darvoudoù a seurt-se. Penaos e vefe kont neuze ma vefe gwall-zarvoudoù gant ar c'hreizhennoù derc'hanel?"



disadorn

KALZ A DUD ER GOUELVRAS

Plogoñv.- 50.000 a dud o doa prenet pep a diked mont-tre er gouelbras enepnukleel d'ar Sul 16/3. Stanket an hentoù tro-dro gant ar c'hirri, ken niver us e oant. D'al Lun 17/3, barnadennoù kriz evit an 9 den a oa o c'hortoz adkrogo frosez abaoe dek devezh: 6 anezho o deus paket ur mizvezh-ret a doullbac'h, 2 pep a bemzekteiz, unan didamallet. Laosket int bet holl da vont d'ar gêr memestra.

Kirri Bro-Japan och aloubiñ an Douar

E 1979 he deus gwerzhet Bro-Japan 4.560.000 karr da vroioù all, da lavarout eo 6,8% muioc'h eget e 1978. Bez e oa en o zouez 39.000 karr-boutin, 1.420.000 karr-samm ha 3.100.000 karr-tan boutin.

2.070.000 karr japanat a zo bet gwerzhet er Stadoù-Unanet (+9,5%) ha 708.600 er C'henvarc'had Europat (+19,5%): 213.300 e Breizh-Veur (+26,8%), 184.300 en Alamagn-ar-C'hornog (+49,3%), 89.300 e Belgia (+10%), ha 56.700 e Bro-C'hall (+48,4%). Gwerzhet o deus ar Japaniz 232.500 karr da Aostralia ha Zeland-Nevez (+8,9%), 396.100 da gevred-Azia (-2,1%) ha 389.100 d'ar Reter-Etre (-4,9%).

E 1980 e tevio moarvat Bro-Japan da vezañ ar vro gentañ er bed evit ar c'henderc'h kirri-tan, dirak ar Stadoù-Unanet. E 1986 emañ ar Japaniz e soñj kenderc'hañ 10.590.000 karr...

WOLKSWAGEN O VAGAÑ CHATAL E BRAZIL

Ar c'hevredad alaman Wolskswagen en deus labouradegoù bras e Brazil, unan anezho e Sao-Bernardo-do-Campo (e-kichen Sao-Paulo), a zo bet lesanvet: "Wolskswagen City". Implijout a ra 27.000 micherour ha kenderc'hiñ 1.250 karr bemdez. Gwelet e vez kirri-tan Wolskswagen e pep lec'h dre ar vro. N'eo ket aotreet ar c'hevredadoù estren da gas o gounidoù en-dro d'o bro-orin en tu all eus 12% eus sammad o fostadurioù. Petra ober neuze gant ar peurrest eus o gounid?

Kavet o deus renerien Wolskswagen un diskoulm souezhus: magañ chatal. Prenet o deus un darn vras eus ar goadeg vraziliat en-dro da Santana de Araguaia e stad Para. Troc'het e vo ar gwez evit ober peurlvanou bras ha digoret hentoù nevez (ouzhpenn 100 km). Kroget mat eo dija an afer. 22.500 buoc'h zebu a vez evezhiet gant 200 den hag a-benn nebeut e vo 110.000 penn-chatal e damanioù Wolskswagen e Brazil!

AR GWENER DU!

Digwener tremenet e oa pep-- tra prest evit an niverenn 15. Labouret ez eus bet dihean e-pad ar sizhunvezh. lleur e oa. Ar mouler: klañv an daou vekanik, ha ret gortoz dibenn an endervezh. Pemp eurvezh kollet evit netra.

C'hwec'h eur. Prest eo ar follennoù. Diouzhtu e tremenomp dre di ar mouler. N'hon eus ket amzer a-walc'h evit dont en-dro d'ar burev. Ret deomp plegañ ar skouerennoù lakaat ur follenn e-barzh pep hini anezho, adplegañ ha lakaat anezho e-barzh ar goloioù... er c'harr-tan!

Erfin e tegouezhomp d'ar burev-post. Kaset int. Ouf!

DILUN HEPKEN EO BET RESEVET GANT AL LENNERIEN ! An holl gelaouennoù sizhuniek a vez resevet gant an dud an deiz war-lerc'h. N'eo ket gwir bep gwech evidomp. Perak?

Al labour hon eus graet a zo bet "distrujet" gant ar mouler (5 eurvezh dale) hag ar Post (un dibenn-sizhun dale). Graet hor boa hor seizh gwellañ evit bezañ resevet ar gelaouenn ganeoc'h d'ar Sadorn, ha resevet hoc'h eus anezhañ d'al Lun.

Hag evel-se bep sizhun! Neuze, bremañ e kemerimp an amzer evit lakaat ar gelaouenn da zont er-maez: AN AMZER a gemero an amzer...!

Ho Kelaouenn Sizhuniek.

ABADENNOÙ

BREZHONEK

RADIO ARVORIG

F. R. 3

skingomz

PEMDEZIEK (ket d'ar Sul)

KELEIER

07e20 Brest (OM & FM)

12e20 Brest (OM & FM)

12e25 Gwened (FM) e-gwenedeg

SIZHUNIEK

DIMERC'HER

"AR SEIZ AVEL"

10e15/11e00 Brest (FM) & Gwened (FM)

DIGWENER

"PEBR HA HOLEN"

10e15/11e00 Brest (FM) & Gwened (FM)

DISUL

"LIV AN AMZER"

11e00/12e00 Brest (FM) & Gwened (FM)

13e00/14e00 Roazhon (OM) & Brest (OM)

N'eus nemet an abadenn-mañ hag a vez posubl klevout e Breizh a-bezh.

skinwel

SIZHUNIEK

DIMERC'HER

"NOZVAT"

19e50 (ket el Liger Atlantel)

DISADORN

"BREIZH O VEGAÑ"

13e30/13e50 Breizh a-bezh

"NOZVAT"

19e45 (ket el Liger Atlantel)

**BEP AN AMZER
SIZHUN**

dre vras

- An Ao Marcellin, prezidant ar C'huzul-rannvro, en deus skrivet da vinistr kentañ Bro C'hall evit gouzout ha graet e vo un dra bennak evit mirout ouzh ar bigi re fall o stad da vont war vor.

- Mui-oc'h-mui a diez-kêr a Vro Gernev, komunourien en o fenn, a sav a-enep da raktres atomva

Plogoñv daoust da c'hêrioù-stur o strollad (a-du eo eñ gant an nukleel): re Lechiagad hag Ar Gilvineg da skouer.

- Un digresk a 15% war an tailhoù tredan, pa vezer o chom nepell eus kreizennoù atomek. Setu, ar pezh a ginnig ministr an ijinerezh. Klevet ho peus, tud Plogo?

UR SIZHUNVEZH E BREIZH

Montroulez.- D'ar Sul 16 a viz Meurzh o deus 500 den kemeret perzh e manifestadeg Talbenn Sevenadurel Araokour Breizh, galvet ma oant gant e strolladoù-ezel (eus an tu kleiz), a-benn difenn sevenadur hor bro.

Kemper.- Ar B.B.C. (skinwel Bro-Saoz) en deus filmet an daou yuner, 2 eus an 9 den tamallet e prosez Plogo, diskrog ma 'z int da zebriñ. En ilizveur Sant Kaourintin e oa.

Plistin.- Bodadeg renerien ar sindikad F.O.-Breizh a oa e Plistin nebeut 'zo. Tamallet o deus d'ar gouarnamant e bolitikerezh kevredigezhel (sokial) bezañ kalet e-keñver ar vicherourien.

Lokireg.- Piv en deus kollet 7 tonellad poezon war draezhennoù Lokireg? Kavet int bet d'ar Gwener 14 Meurzh. Daou-gloropropan (dichloropropane) a zo enno, sañset. Gwelet ez eus bet reoù all o tont wardu aodoù Montroulez ha Ploueskad.

Sant-Malo.- Divizet eo bet gant an ti-kêr difenn d'ar c'hezeg-tan mont en-dro etre 8eur noz ha 7eur beure.

Naoned.- Labour a vo evit ar gevredigezha sevehistri "Dubigeon-Normandie". Goulennet ez eus bet ul lestr da redek mor digant ur paramantour eus Bro Danmark ha daougarr-ferry evit Korsika.

Sant-Nazer.- Renerezh rannvroel an hentoù-houarn ha Kambr-Genwerzh Sant-Nazer o deus divizet a-gevret paeañ evit ur raktres da gempenn ha modernaat ar gar.

Naoned.- Dont a ray e Breizh, da vare an diskar-amzer, Prezidant Bro-C'hall, an Ao Giscard d'Estaing. Hemañ a zigoro porzh-metan Ar Moustier (Liger izel).

war vord al Liger ...

Naoned.- Emañ an SEPNB o klask kas d'an traoñ un divizad, anezhañ kealiou re zañjerus evit an endro, hag e fell dezhañ lakaat aber al Liger da vezañ terket war lodennoù 'zo e-sell da vrasaat an tachadoù c'hreantel. Kroget o deus gant al labourioù war zouaroù Lavo, met ivez war draezhenn vBilho e-lec'h ma vez kalz a evned o vevañ. An deizioù a zeu, e kinnigo an SEPNB hec'h arguzennoù dirak ar C'huzul-Stad, peogwir n'eo ket bet kavet mat ar re-mañ gant al lez-varn vererezhel.-(Kenskriver Bro-Naoned)

SONADEGOÙ

Ur sonadeg gant "THE POLICE"

Ma fell deoc'h enrollañ ur sonadeg gant "The Police", n'hoc'h eus nemet ober an dra-se d'an 8 a viz Ebrel. Diwar France-Inter e vo, etre 2leur ha 22eur. Ar sonadeg-se a vezo graet war an taol ("en direct"), sur eo; e Lyon.
P.C.

kemennoù bihan

- GWERZH: Simca 1300, bloavezh 63, keflusker 68.000 km, pneuioù nevez en diaraog, starder-ezoù adsellet, war-dro 1.500 lur. Pg(99)50.52.74 .

- Ograou elektronek da werzhañ Viscount Fair-Lady, 2 douchenn-aoueg, sonioù a bep seurt, troadikeller, boest mentadurioù, liv tek, nevez (prenet 6 miz 'zo). Priz izel. Skrivit d'ar gelaouenn.

SPORTOÙ

ABADENNOU MELLDROAD

-Rummad kentañ:
Naoned 1/2 Lille
-Eil rummad:
Roazhon 2/2 An Havr-Nevez
Kemper 0/2 Pariz F.C.
-Trede rummad:
St. Brest 0/0 Chartrez
A.S. Brest 2/1 Sant-Brieg
U.S. Konkerne 0/3 Poissy
-Eil rummad a-enep d'ar rummad kentañ:
Gwengamp 0/2 Valenciennes
-Rummad a enor:
U.S. Kleder 4/0 AS Plouhineg
FC An Oriant 1/1 E. St Laorans
DC Karaez 2/2 St. Roazhon
US Berne 4/2 SO Maine
St. Lanuon 2/2 USSC Redon
US Sant-Malo 1/0 Louanneg
EA Gwengamp 1/0 AS Lan Ar Ster

AN AMZER

2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

Kelaouenn sizhuniek
CPPP 62319

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU:

3 MIZ (12 niverenn):
Reizh: 18 lur
Studieren, skolidi: 12 lur
Skoazell: 20 lur
6 MIZ (24 niverenn):
Reizh: 36 lur
Studieren, skolidi: 24 lur
Skoazell: 40 lur
12 MIZ (48 niverenn):
Reizh: 72 lur
Studieren, skolidi: 48 lur
Skoazell: 80 lur

KRP (Decambourg): 25.97V Roazhon

Moulet ez eus bet 500 sk.
ag an niverenn-mañ

KOMZOÙ DIEUB

(Kendalc'h ar bajenn 1)
a lennfen bremañ? Gwir eo,
marteze na vije ket bet fall-
oc'h.

A-hend-all, n'eus ket kement-
se a dud o lenn brezhoneg, na
marteze kement-se a embannad-
urioù e brezhoneg ivez evit
bezañ re figus ha n'int ket da
dabotal diwar-benn Afghanistan,
Bro-Sina pe Bro-Saoz. Traoù
all am eus d'ober, da gentañ,
skoazellañ embannadurioù Breizh
e brezhoneg, daoust a zo kon-
iri a-wechoù e-barzh, evel er
c'helaouennoù gall, ha pennad-
où na glotont tamm ebet gant
va zemz-spered. Se a zo traoù
bihan, traoù dister e-keñver
an nebeut traoù moulet e
brezhoneg. N'omp ket gwell
pinvidik ha gwelloc'h evidon
lenn "kao c'h" pe "va.reor" ur
wech an amzer eget chom hep
lenn brezhoneg.

Pa sellan mat, gallekaet omp.
Ne soñjomp ket evel bretoned
da gentañ, met evel ar c'hall-
aoued. Barn an traoù a reomp
hervez ma 'z omp eus an tu
kleiz pe an tu dehou. Ar gwir
hon eus evel ar re all kaout
menozioù tu-pe-du, hogen da
gentañ gwelout hor bro. Amzer
hon devezo da c'houde d'en em
dabotal, da reiñ taolioù-troad
e reor hor c'henvroidi ma gav
deomp e vez ret, daoust d'am

Ar C'helaouennerezh Brezhonek Nevez Mark SEURIAL

Div gelaouenn nevez a zo
deuet er-maez evit ar wech
kentañ e-pad ar pemzektez-mañ:
AL LANV (magazin), ha BREMAN
(kazetenn; ment vras).

Ar pezh a c'heller lavarout
a zo: gourc'hemenoù eus ar re
wellañ d'an div. Bemdez e vez
diskouezet n'eo ket c'hoazh
ar vrezhonegerien prest da
lezel o yezh da vervel.

AN AMZER, PLANEDENN, AL LANV,
meno n'eo ket un disoc'h.

Bet em eus, n'eus ket pell,
un etreweladenn gant Kadafi,
rener Bro-Libi. Lavaret en deus
din: "Tud kon a zo e Breizh.
Evidon ma na ran forzh ma vez
skrivet va anv "Khadafi" gant
un "h", pe "Kadafi" hep "h";
dre ma vo komzet en arabeg
gant ar spered islamek, Allah
a zo Allah, ha n'eo ket allaz,
ha skarz ar saozneg hag ar
gallek.

Dalc'het em eus etreweladenn
K(h)adafi, ha ma kavan ur
verrad amzer, skrivañ a rin
ar pezh em eus klevet digantañ.
Ur gentel evit ar Vretoned ma
din gouest da gompren.

N'on ket boazet da chouchenna,
hogen, ma kejan gant J.C. un
deiz bennak, he ma 'z eus
chouchenn war an daol, laouen
e vin stekiñ va gwerenn ouzh e
hini...da Vreizh.

Herve HERRY.

BREMAN...e-korf un tri mizvezh
bennak. Huñvreal a reomp? Nann!
muioc'h eget biskoazh eo em-
skiantek difennourien hor yezh
ez eus un toull war dachenn ar
c'helaouennerezh.

Kresket o deus an tiez-embann
niver al levrioù embannet
ganto (s.o. AL LIAMM: +140%,
Preder, Brud-Nevez...). Met
war zigresk e oa niver ar
c'helaouennoù brezhonek. Ne oa
nemet AL LIAMM a dalc'he mat
(daoust da vezañ paeet gant ar
profoù un niverenn bep bloaz,
d.l.e. 1/6 eus ar gelaouenn).
E.A.B., Wanig&Wenig, Imbourc'h
Hor Yezh, Skrid, a chom dre
vras evel en a-raok, daoust
d'un nebeut kudennoù. Hogen un
digresk a zo bet e POBL VREIZH
hag aet kuit ez eus bet div
gelaouenn: Barr-Heol, hag EMSAV.

Miz Here 1979: PLANEDENN; AN
AMZER.

Miz Meurzh 1980: AL LANV;
BREMAN.

Peder c'helaouenn nevez, pep
hini disheñvel an eil ouzh
egile: ur gelaouenn lennegel,
ur gelaouenn a geleier, ur
magazin, ur gazetenn eus ar
stourmoù e Breizh. Leuniet eo
an toull!

Posubl e vefe soñjal eo mat
stad ar c'helaouennoù brezh-
onek. Arabat huñvreal! Chom a
ra ar gudenn: ar memes tud eo
dre vras a lenn ar c'helaouenn-
où-se, he pal pep hini eus ar
c'helaouennoù-se a zo kavout
pep a lennerien nevez; Neuze e
vo posubl lavarout, pe skriv-
añ: "Ya, war wellaat ez a stad
ar c'helaouennoù brezhonek, se
'zo sur!"

Arabat leñvañ. Pa varv ur
gelaouenn, ez eo un dra trist
evidomp, hag evit n'eus forzh
pe gelaouenn... Pa vez krouet
unan nevez, un dra vat e vez
evidomp, ha dav bezañ laouen.
Peder c'helaouenn a zo bet
krouet nebeut 'zo. Neuze,
sellomp war-du an amzer da-zont!

Adalek an niverenn a zeu e
vo diskouezet pep hini eus ar
c'helaouennoù-se.

Mark SEURIAL.

BRASAÑ HA KLOKAÑ GERIADUR EUS AR BREZHONEG**GERIADUR ISTOREL****AR BREZHONEG****Roparz HEMON**

eil embannadur

PREDER

Penn Menez PLEUVEILH
29000 KEMPER